

DEZRVELLOÙ AN DUD KENFINET RÉCITS DE CONFINÉS

*N'eus den ebet ken o vale er straedoù,
n'eus oto ebet ken o ruilhañ war an hentoù,
n'eus bag ebet ken o vageal war ar flodoù,
n'eus karr-nij ebet ken o nijal en oabloù,
evel ma oa harzet an amzer,
evel ma rae un ehan berr.
Met an amzer a gendalc'h da ziaraogiñ
hag an natur da zihuniñ.
An heol zo o parañ,
ar gwez zo o vroñsañ,
ar vleunioù zo o tispakañ,
ar gwenan zo o vleuñvata.
Kan karantez al lapoused zo klevet
c'hwezh ar bokedoù-laezh zo ruflet
petalenoù an tulipez zo digoret
hag an holl liorzhoù zo lieslivet.
Sur eo, an nevez amzer n'eo ket bet koñfinet !!*

Armelle